



IMBOURC'H

**Kelaouenn Emglev An Tiegezhioù niv. 68 Here – Du - Kerzu 2010 Priz : 2
€**

Hor Bara Pemdeziek

War-lerc'h an tangwalloù divent c'hoarvezet e Rusia en hañv-mañ, hag o deus distrujet un toullad mat a barkadoù gwinizh, en deus diskleriet ar mavdiern Vladimir Poutin, e vefe ehanet da ezporzhiadur gwinizh Rusia, keit ha ma ne vo ket graet ar poent war eostad 2010¹. Brasañ ezporzhier gwinizh eo Rusia, hag evel-just mar befe paouezet gant ar vro-se gwerzhañ e winizh war ar marc'had etrevroadel e vankfe kalz dioutañ hag e kreskfe² ar priz. Kerkent gouezet eo bet lakaet o c'hrabanou war ar c'heleier-se gant ar gelaouennerion, o lavarout e vefe skoet ar broioù paour da gentañ gant kreskidigezh priz ar gwinizh ha priz ar bara da heul, ha marteze naonegezhioù a vefe da c'hortoz e lec'hioù 'zo. Da geñver ar c'heleier-se eo e klevis er skinwel unan o lavarout ne zlefe ket priz ar gwinizh kreskiñ kement-se priz ar bara, peogwir ne oa priz ar bleud gwinizh nemet evit 7% eus priz ar bara. Un tammig izel e kavas din e oa an dregantad-se, met traoù all em boa em fenn er mare-se.

E kentañ sizhun miz Gwengolo edon e ti va mab e Roskov. Bep beure ez enaoue e skingomzer da geñver hol lein-vihan evit selaou ar c'heleier. Ur mintin e voe anv eus eostad gwinizh ar bloaz-mañ er C'hwec'hkogn, bet lakaet fall gant ar sec'hor. Digresket e vije bet eus 25 % e lec'hioù 'zo, keñveriet gant eostad 2009, evel em eus klevet digant kouerion en-dro din, hogen Marie de Greff-Madelin en ur pennad e-barzh ar sizhunieg gall *Valeurs Actuelles*, 2 a viz Gwengolo 2010, a gomz eus un digresk a 3 % hepken, gant un askor³ priziet a 71 **kantolz** dre **hektar** pa oa 76,5 er bloaz tremenet⁴. Ar wech-mañ c'hoazh e voe meneget dregantad priz ar gwinizh e koust hollek oberidigezh ar bara : 5 % hepken. Kadarnaet e veze an dregantad-se gant Marie de Greff-Madelin en he fennad-skrid, en ur venegiñ sifr an FNSEA sindikad pennañ ar c'hounideion. Ober a ris merkañ d'am mab e oa bet digresket c'hoazh an dregantad-se : setu ur miz e oa 7 %, ha bremañ 5 %, hogen n'em boa ket soñj ken mar beze komzet en div wech eus

³ Askor : *rendement*.

⁴ An dra-se a ra din soñjal en askoradoù en atant va zad war-dro 1955 : 20 **kantolz** dre **hektar** a oa un eostad mat kenañ, gant un amrizhenn anvet « *Trikar* » pe « *Trikaw* » (anv deveret, moarvat, diouzh al latineg *triticum*=gwinizh), hogen kouerion 'zo a zeue a-benn endeo da dizhout 35 **kantolz** gant un amrizhenn nevez, anvet « *Capelle* », ha temzoù kimiek e-leizh evel-just. Unan eus perzhioù mat an amrizhenn-se a oa kaout ur c'harenn plouz berroc'h ha postekoc'h, a harze ouzh ar gwinizh stokañ, pezh a oa rebechet alies d'an *Trikar* pa veze glav arnev.

¹ ¼ eus ar gorreadoù a zo bet distrujet e Rusia hag a-benn ar fin un digresk a 40 % a winizh eostet ; en Ukraina en abeg d'ar sec'hor 15 % nebeutoc'h ; e Kanada en abeg da liñvadennou 14 % nebeutoc'h ; e Tunizia en abeg d'ar mank dour-glav 50 % nebeutoc'h a edoù eostet.

² E miz Gouhere, e Chicago, e oa bet graet al lamm a 38 % gant priz ar gwinizh.

gwinizh hepken, pe bleud gwinizh, se a c'hellfe ober an diforc'h a 2%.

Displegañ a ris d'am mab e tistruje an dregantad izel-se, an displegadenn bet roet din gant ur varaerez eus Blaen a-zivout ur gobidell all. Se a oa ugent vloaz 'zo marteze pe muioc'h c'hoazh : ur baraerezh greantel eus Angers a ginnige gwerzhañ ar varaenn (*baguette*) ul lur-gall ar pezh, pa veze gwerzhet etre 1,30 ha 1,40 lur-gall gant ar baraerdioù artizanel. Evit ar varaerez e oa an diforc'h priz da gavout e gourferzh⁵ ar bleud arveret. Hag e kontas din penaos e oa bet gweladennet, ne oa ket pell, gant ur miliner en devoa kinniget dezhi ur bleud a c'hourferzh izeloc'h⁶, a c'hellfe bezañ arveret evit ober ar bara a burchase da bredtioù ar skolioù, da skouer. Respontet he devoa d'ar miliner-se ne oa ket boazioù an ti ober un diforc'h etre o arvalion, ha din e lavaras e oa priz izel ar varaenn gant baraerezh greantel Angers da glask aze : implij a rae ur bleud a c'hourferzh izeloc'h a oa digoustusoc'h eget an hini arveret gant he gwaz. Ne c'helle ket, an dra-se da welout an traoù, kadarnaat ar fed na vefe ar bleud gwinizh nemet evit 7 pe 5 % e priz ar bara.

An divizadenn-se etre va mab ha me, a zegasas ac'hanon da zisplegañ dezhañ penaos e oa hon darempredoù gant ar miliner hag ar baraer p'edon en atant va zad er bloavezhioù pemont. Tremen a rae ar miliner gant e garr-kezeg, a atant da atant, da sammañ ar sac'hadoù greun da valañ. Ne veze ket roet arc'hant d'ar miliner, mirout a rae un dregantad eus ar bleud a denne eus hor greun malet, etre 10 ha 14 %⁷, evit e labour hag hini e vilin. Degas a rae deomp endro ar brenn, a servije da aozañ boued ar moc'h, d'an droiad da heul pa dremene a-nevez evit kemer sac'hadoù greun all da valañ. Hag eus hor bleud petra veze graet gantañ ? Kaset e veze gant ar miliner war-eeun da di ar baraer evit

⁵ Gourferzh : *qualité*.

⁶ Ar bleud izelbriz-se a vez tizhet gant gwinizhoù askor uhel, hogen gant un dalvoudegezh varaadus izel, hag ur miliner all en devoa lavaret din zoken ne oa ket mat ar gwinizh gounezet en tolead da ober bara, arveret e veze hepken evit ober boued-chatal.

⁷ Kadarnaet eo bet ar sifrou-se gant ur miliner war e leve, eus Blain, maz on bet e darempred gantañ.

ober bara deomp. Heñvel an traoù gant ar baraer, ne veze ket roet arc'hant dezhañ. Mar beze degaset dezhañ kant lur-pouez bleud, e rente deomp kant lur-pouez bara. Met, penaos e veze gopret hemañ evit e labour ? Gant an diforc'h pouez a zo etre ar bleud hag ar bara graet gantañ. Gant 100 lur-pouez bleud e vez graet war-dro 133 lur-pouez bara dre ma vez atodet dour, holen ha goell evit ober an toaz. An 33 lur-pouez-se ouzhpenn a oa gopr ar baraer. Ha c'hoazh e tegase deomp ar bara bep sizhun gant e sammorellig. Ur wech c'hoazh, en degouezhmañ emañ o paouez komz deoc'h, ne gredan ket ne oa ar gwinizh pe ar bleud gwinizh nemet evit 7 pe 5 % e priz ar bara. Evit an tieg e kouste 100 lur-pouez bara kement ha 100 lur-pouez bleud, pe 114 lur-pouez greun gwinizh, peogwir ne ziyalc'he gweneg ebet evit ar miliner pe ar baraer. N'ouzon ket ken bremañ pegement e oa priz ar gwinizh hag hini ar bara setu hanter kant vloaz 'zo, hogen a-fed dregantad e oa kalz en tu all da 5 pe 7 dre gant, arvar ebet war an dra-se.

Bez' e tisplegas din va mignon ar miliner kozh avat, e oa marteze dregantad izel priz ar gwinizh e priz ar bara, da gavout, evit un darn d'an nebeutañ, en niver bras a vara-faltazi (*pains fantaisie*) a vez graet bremañ gant ar varaerion, hag a c'houlenn muioc'h a dorn-labour hag a amzer evit o ober eget na oa ezhomm gwechall evit ober baraoù pevar lur-pouez, ha zoken c'hwec'h lur-pouez, a veze boas tud diwar ar maez da guzumiñ hanter-kant vloaz 'zo. Hogen douetañs en devoa memestra war un dregantad ken izel-se. Ankounac'haet em eus lavarout deoc'h ne oa talvoudek an aozidigezh-se etre kouerion ha baraerion, nemet evit ar bara boutin-se, met tud diwar ar maez ne oant ket chalet gant-se, ar varaenn (*baguette*) evito ne oa nemet evit begoù figus tud ar bourk, hag un tammik heñvel e tle bezañ er broioù paour hiziv, e-lec'h e vez doujet naonegezh : bara boutin eo a vez kuzumet gant an dud paour, hag evito dregantad priz ar gwinizh ne zle ket bezañ nemet 5 pe 7 dre gant e priz ar bara, anez bezañ mennet da lavarout ez eo ar varaerion laeron holl.

Yann MIKAEL

Gwelloc'h eo diwezhat eget nepred...

D'an 3 a viz Here 2010 edo bodet e Zagreb, kêrbenn Kroatia, "*Kuzul Bodadoù Broadel*

Eskibion Europa". Da zibenn ar vodadeg-se e voe embannet un diskleriadur evel ma vez ar

boaz peurliesañ da geñver hevelep bodadegoù. En diskleriadur-mañ, a-berzh eskibion Europa, em eus merzet ur frazenn a-bouez : “*Markendalc’h Europiz gant ar sevenadur-mañ a varv e vo diboblet Europa, hag aloubet gant tud ur sevenadur all*”. Ar sevenadur-mañ a varv ma veze graet meneg anezhañ gant an eskibion-se a oa hini ar sioc’hanerezh hag hini an helazherezh, hogen evit pezh a sell ouzh dibobladur Europa e veze anv dreist-holl eus sioc’hanerezh.

Lavarout a ran “*gwelloc’h eo diwezhat eget nepred*”, rak e-pad pell o deus tavet eskibion ha beleion war geal ar sioc’hanerezh lezennel. Perak ? Da damall ez eus marteze ur spered bennak a Sened-Meur pa felle d’an Iliz goude-Sened en em zigeriñ d’ar bed, bezañ diouzh ar bed, en ur ger plegañ da c’hizioù ha kealiadurezhioù ar bed, neuze ne oa ket anv mont a-enep d’un tebet lezenn mouezhiet ent-demokratel⁸, an anv-gwan “demokratel” o reiñ d’al lezenn bezañ a-us da lezenn Doue, neketa !

A-walc’h em eus pleustret an iliz evit lavarout n’em eus biskoazh klevet beleion o kendaoniñ, en un doare sklaer, ar sioc’hanadurioù en o sarmonioù. Mard eo bet graet meneg anezho a-wechouigoù ez eo bet bepred gant gerioù goloet, evel “ret eo dougen bri d’ar vuhez adalek he derou”. Trawalc’h evel-se, arabat feukañ den !

Koulskoude, e 1975, pa voe mouezhiet lezenn an IVG er C’hwec’hkogn, e vije bet selaouet an eskibion, muioc’h eget 35 vloaz war lerc’h, rak kalz muioc’h a dud a bleustre ar relijion, hag ar rummad feizidi da neuze a oa kizidikoc’h ouzh erbedennoù ar gloer eget hini bremañ, ma vez ar skinwel hag ar meziennoù dre vras o ventrezhañ⁹ ar speredoù a-hed an devezh. An testeni gwellañ war an divoud-se a zo hini kinnigerez al lezenn, Simone Veil hec’h-unan, p’he deus diskleriet ne vije ket bet mouezhiet he lezenn m’o dije an eskibion komzet a-enep dezhi d’an ampoent. He

⁸ Ned eo ket ken ent-demokratel-se e vije bet mouezhiet al lezenn war ar sioc’hanerezh e Bro-C’hall. Hervez levr Véronique Willemin, *La Mondaine, Histoire et Archives de la Police des Mœurs*, Editions Hoëbeke, Paris, 2009, ur rener, bet e penn ar vrigadenn-gerreizh-se e-pad meur a vloavezh, en dije kontet d’ar skrivagnerez penaos e oa kannaded enebet ouzh al lezenn a vije bet rediet da vouezhiañ eviti daoust dezho. Daremprediñ a raent, pe o devoa darempredet, e kuzh evel-just, ur fouzhdi a lorc’h hag edo o anv war fichennoù gwenn Brigadenn ar Stuzioù, ar fouzhdi-se a servije, evel reoù all dilorc’hoc’h, da wezhour titouriñ evit ar gerreizh. Begozhet e vije bet ar gannaded-se da welout o anv diskuliet er Wask mar ne vouezhient ket a-du gant al lezenn Veil.

⁹ Mentrezhañ : *formater*.

brasañ aon e oa, hogen mut e chomas an eskibion.

Hiziv ma wel an eskibion disoc’h o digalonegezh e klaskont ersaviñ¹⁰, seul vui ma n’o deus ket paouezet er c’heit-se da vroudañ o feizidi da zegemer brokus an enbroidi, hogen daoust hag eñ n’eo ket re ziwezhat ? Tud ur sevenadur all a aloubo Europa mar ne vez ket paouezet gant ar sevenadur a varv, ma komz an eskibion diwar o fenn, e oar pep hini eus piv e vez anv, eus ar Vuslimiz eo evel-just. Pa welont tonkad a-vremañ ar Gristenion er broioù ma vez muslimat ar muiañ niver enno er Reter-Nesañ e tibikouz o daoulagad, e welont an islonk dindan o zreid. Tagadenn iliz-kador Baghdad nevez zo, maz eus bet lazhet 52 den enni (kerreizhourion ha feizidi), a zo bet kriz ha spontus a-walc’h evit bukañ warni kameraoù skinweloù ar bed a-bezh, hogen diaesterioù buhez pemdeziek Kristenion ar Reter, evel dezrevellet e pajennoù levr Joseph Fadelle (gwelout ar pennad “*Priz ur gantroidigezh*” e Kannadig Imbourc’h niv. 66), ne vezont ket kontet kalz da dud ar C’hornog. Arabat feukañ den, ezhomm tireoul hon eus ! N’eo ket bet dalc’het ar C’horonal Khadafi, mestr Libia, gant hevelep skorpul p’en deus diskleriet e Roma d’an 30 a viz Eost 2010 “*Bez’ e rank an Islam dont da vezañ relijion Europa a-bezh*”, ha d’an 8 a viz Mezheven 2010 en devoa diskleriet d’ar gelaouenn *Al-Shams* e Libia : “*C’hwi (ar Vuslimiz) ur bihanniver ez oc’h en Europa. Un deiz e teuot da vezañ ar muianiver, Allah henn fell dezhañ ! Hag ho pezo ar renerezh (war Europa). C’hwi zo o vont da vezañ imamed hag hêrezherion kevandir Europa. Turkia o vont e-barzh an Unaniezh europat a dalvez ne vo mui ar c’hevandir europat ur c’hevandir kristen. [...] Gortoz a reomp an deiz ma emezelo Turkia d’an Unaniezh Europat en doare ma chomo en istor evel marc’h Troia an Islam. Setu ni gouzavet : d’ar bolitikerion europat a fell atav dezho degemer Turkia en UE, da brederiañ war ar c’homzoù-se.*

Er Vatikan ez eus bet memestra ur vouezh aotreet evit enebiñ ouzh haeradennoù Khadafi, hogen, da geñver un abadenn all : e Sened eskibion gatolik ar Reter-Nesañ, bodet e Roma gant ar Pab, etre an 10 hag ar 24 a viz Here 2010, evit breutaat, dres, war saviad Kristenion ar Reter-Nesañ, ar gengomz gant an Islam hag ar

¹⁰ Ersaviñ : *réagir*.

geveskemmed¹¹ relijiel, ez adkave ar Vatikan doare-lavar ar rouinellerezh¹² boas.

Sklaer kenañ, eo bet diskouezet gant an Aotrou'n Eskob Raboula Antoine Beylouni, arc'heskob libanat Antiokous, devoudelezh¹³ ar gengomz gant an Islam. Re sklaer e oa moarvat e areizh¹⁴, rak "kaviardet" eo bet un ugent bennak a linennadoù en azrevell¹⁵ embannet gant an *Osservatore Romano*, kelaouenn gefridiel ar Vatikan. Koulskoude e telleze an arroudenn-mañ bezañ meneget, rak a-benn nemeur e c'hellfe dont da wir evidomp ar pezh a vez kontet enni.

Bez' e sache an Aotrou'n Eskob Mgr Beylouni hon evezh war krafadurioù pleustrek ha sokial "diaes da embreger paz int bet embreget gant ar C'horan pe ar Sunna", hag e komze eus ar C'horan : "sankañ a ra e spered ar Muslimad al lorc'h da gaout ar relijion nemeti, gwirion ha klok. [...] setu perak e teu d'ar gengomz gant an dreistelezh-se hag an diogelded da vezañ trec'h. [...] Er C'horan n'eus ket a ingalded etre ar gwaz hag ar vaouez, na zoken en dimezi e-unan [...]; nag e keñver hêrezh e-lec'h en deus ar gwaz ur rann daougement ; nag en un testeni dirak ar varnerion e-lec'h m'eo par mouezh ur gwaz da vouezh div vaouez... Ar C'horan a aotre d'ar Muslimad kuzhat ar wirionez d'ar C'hristen ha da gomz ha gwezhiañ¹⁶ en diac'hin d'ar pezh a soñj hag a gred. Er C'horan ez eus

¹¹ Keveskemmed : *réciprocité*.

¹² Rouinellerezh : *diplomatie*

¹³ Devoudelezh : *réalité des faits*.

¹⁴ Areizh : *allocution, exposé*.

¹⁵ Azrevell : *version*.

¹⁶ Gwezhiañ : *agir*

gwerzadoù dislavarus ha gwerzadoù nepekaet¹⁷ gant re all, pezh a ro d'ar Muslimad an tu da arverañ an eil pe egile hervez e splet. Reiñ a ra ar C'horan d'ar Muslimad ar gwir da varn ar Gristenion ha d'o lazhañ dre an djihad. Reiñ a ra urzh da c'hourvodiñ¹⁸ ar relijion dre an nerzh, dre ar c'hleze. [...] Setu perak ne vez ket kedanavet gant ar Vuslimiz ar frankiz relijiel, nag evito, nag evit ar re all". N'eo ket an Aotrou Beylouni enebet ouzh ar gengomz gant an Islam. Gant ma vefe, a vez resizet gantañ, renet gant kendivizerion gristen barrek ha stummet mat, kalonek ha deol, fur hag evezhiek [...] a lavar ar wirionez gant sklaerded ha kendrec'hidigezh".

Daoust hag eñ e vo selaouet an eskibion gant ar bolitikerion, se zo un abadenn all. Emañ an dorzh etre o daouarn bremañ, hag int eo dreist-holl o deus ar galloud da gemm an traoù. Hogen mavdiernez c'hall evit ar Yec'hed, da skouer, en ur zaougementiñ ar gopr dre sioc'hanadenn evit dedennañ mezeion da ober al labour divalav-se, nac'het mui-ouzh-mui hen ober gant al lod brasañ anezho, ned a ket war an tu-se, na lakaat ar skorennoù tiegezhel dindan divizoù pinvidigezh, unan eus kinnigoù pennañ danevell Attali 2, a vo gounidus nemet evit tiegezhioù an enbroidi o deus kalz bugale, hag a vo dedennet muioc'h c'hoazh da zont, ha displetus evit tiegezhioù ar c'hendere krenn, na vo ket broudet da gaout un eil pe un trede bugel, peogwir ne vo skorenn ebet evito.

Donwal Gwenvenez

¹⁷ Nepekaet : *annulé*.

¹⁸ Gourvodiñ : *imposer*.

Un Eñvorenn

Digarez hag absolvenn a rankan goulenn digant al lenner, peogwir emañ o vont da gregiñ gant ar pennad-mañ dre zezrevell ul lodenn zister eus ma zammig buhez a netra, gant ar spi da gavout en eñvorenn-se evezhiadennoù talvoudus evit an holl.

Kerkent ha ganet, e oan bet paket gant ur c'hleñved iskis ha nebeut anavezet em skevent, a zaleas ma dizoloadenn eus ar bed-mañ e-pad seizh vloaz, betek an deiz kentañ maz is d'ar skol ; ar c'hleñved-se a vac'he ac'hanon en ur stad hogos diemskiant, leun a derzhienn, hag alteriñ a raen ivez (biskoazh n'on deut er-maez eus ar stad-se, hervez ma zekrierien).

Em lifre skoliad e seblanten bezañ heñvel ouzh ar vugale all ; ur gwir babig a oa ac'hanon koulskoude, inosant evel ul labousig, dic'houzvez eus ar pec'hedoù hag an holl draoù all.

Peogwir e oa relijiel ar skol, e veze lennet deomp gant ar gelennerien arroudou eus an Aviel a frome ac'hanon ken e tiouelen ; dre ur poellad didizhadus din avat e tastement diwar an testennoù-se ar retvez da anzav ar pec'hedoù, ha me gant ma rollad berr-berr n'anavezen nemet ar pec'hed-orin. Kuzhat a raen evel ma c'hellen ma abafded dirak ar gudenn-se, hag el lostad skolidi dirak ar gador-gofes em boa spi e trofe pep tra

da sklaer pa zeufe va zro. Siwazh, ar pep gwashañ a oa da c'hoarvezout neuze. Eus a-dreñv ar ridell e klevis ur beleg dizanav o c'houlenn ganin :

- Ha traoù lous ac'h eus graet ?

N'em boa tamm meizad ebet eus ar pezh a c'hallfe bezañ an traoù lous-se, met seblantout a raent bezañ afer an holl, ken e respontis, dre ragevezh : "Graet em eus". Krog e oan da en em gavout dizankeniet dija gant ar berzh em boa graet en arnodenn gentañ-se, pa glevis ar beleg oc'h eilgeriañ :

- Gant paotred pe gant merc'hed ?

Setu-me paket, emezon din-ma-unan, spontet-mik. Penaos em dije gallet gouzout e c'halled ober an traoù lous-se gant an eil rev koulz ha gant egile ? Kuit a vont muioc'h war un tu eget war an tu all, e respontis : "Gant an daou." Lezet e voen neuze da vont, ha pediñ dek pater ha deg Ave Maria, un dra a oan dija boaziet da ober hep dleout tremen dre ar vezhekadenn-se a-raok.

Meur a viz a dremenas hep ma resevis titour asur nevez ebet a-zivout an aferioù dinaet-se. Zoken pa grogis da intent diwar-benn petra e oa kaoz e oa c'hoazh start din krediñ e bezañs an traoù lous-se, a seblante enoeüs-kenañ ha dibal a-grenn din. Degouezhet diwezhat en ur bed peurleun a draoù dedennus, ne c'hallen ket meizañ koll amzer oc'h ober "traoù lous" e lec'h ober traoù deurus-dreist evel c'hoari melligoù, farsal diwar-benn Roy Rogers pe mont da arvestiñ ouzh troioù-kaer skeudennet Tom ha Jerry.

Diwezhatoc'h e voe graet anv din eus ar "c'hoari tastornat an eil egile" a gemere perzh lod bugale enno, met peogwir n'em boa biskoazh gwelet seurt c'hoari e chomen c'hoazh hep krediñ ; van da grediñ a raen hepmuiken, kuit da zirenkañ ma c'hendivizerion pe da seblantout bezañ un istrogell. An traoù lous-se, ma oa anezho evit gwir, ne c'hallent bezañ a-benn ar fin nemet un dra evit ar re vras, an dud skuizhus-se na gaozeent nemet diwar-benn krafoù torr-penn : dleoù arc'hant, kleñvedoù an dud, naetded hag urzh-vat an ti, politikerion tarwazherion, tredeoged mell-droad laeron, hag ar gwashañ-holl : ar re vras-se a gave dezho e oa yac'husoc'h debriñ brokoli eget skornenn. Peseurt hoal a oa d'an obererezh lous, sed aze un dra a oa digomprenadus a-grenn din.

Pa intentis pep tra en diwezh, e teuis da vezañ dedennet me ivez gant an dra. Ur fed all avat a

sachas ma evezh, hag hemañ ne oa ket fentus tamm ebet : o prederiañ war ma c'hofesadenn gentañ e welis peseurt islonk a ziforc'h a c'hall bezañ etre gwirvoud hon ene hag ar rolloù e vezomp galvet da c'hoari er gevredigezh, rolloù a servij d'ar re all da anavezout ha da envel ac'hanomp ; ha nerzh an adlavarerezh hag an adc'hoarvezout a ra d'ar rolloù-se mougañ hor santadennoù diabarzh en diwezh. D'ar poent-se, al lodenn dizanv ha diyezh ac'hanomp a dro da aonioù dilavaradus, fantasmennoù, mezhioù dianzavadus, santadennoù distumm ha dizisplegadus.

E pad ma marevezh a gleñved-bras, em boa bevet kalz muioc'h a boanioù eget ar pezh a c'hellfe bezañ meizet zoken gant bugale ma oad. Ur bed teñval, mac'homus, serr e oa. Dilavaradus dreist-holl : dremmoù ankeniet ma mamm, ma zad, ma eontr, ma moereb a welen, int hag a glaske sachañ ar boan diganin en aner, dic'halloud ha dinerzh, int hag en em chale hep digoll. Pep hini a dremen dre ur marevezh e-giz-se ur wech bennak er vuhez : er c'hleñved, en dienez, er follentez, en digenvez, pe en toullbac'h. Ar pezh a lak kemm etrezon hag ar re all eo em eus anavezet an tu teñval-se eus ar vuhez a-raok forzh petra all. Pa zifloupis kuit eus an ifern-se, an holl draoù en-dro din a seblante ken deurus, ken kaer, ken hoalus, ken e oa digredus penn-da-benn din keal unan bennak o vont da glask plijadur ouzhpenn e traoù all. Dizanav e oa an orged din, ha ne c'hallen ket meizañ en defe lod ezhomm anezhañ (kement hag am eus lennet diwezhatoc'h war buhez revel ar vugale a seblant din bezañ genaouegaj divoutin abalamour da se). Setu e oa ur gwir istrogell ac'hanon er par-se, un tammig e-giz Lao-Tseu a c'hanas kozhiad hag a droas da vabig gant an amzer. Ne oan ket an istrogell nemetañ en hollved avat, anat. Diwezhatoc'h e teskis penaos pep hinienn en deus en e greiz donañ un dra disheñvel a-grenn diouzh an holl re all, un dra nebeut tizhet gant ar yezh hag al lavar, hag a vez dianav penn-da-benn zoken d'an dud tostañ peurliesañ. Ha ster pennañ ar gevredigezh, a-benn ar-fin, a zo klask tizhout ar c'hreiz kevrinus-se dre ar yezh hag ar sevenadurezh, binviji da vezañ taolet kuit ur wech tizhet ar pal.

Ar c'hevredigezhioù denel a bep seurt a c'hall bezañ keñveriet (ha barnet zoken) dre sellout ouzh o barregezh da arverañ ar yezh hag ar boazamantoù kumun evel benveg d'ur gejadenn wirion etre an hiniennoù. Diwar kement em eus bevet ha gwelet abaoe, e tastuman n'eus den ebet

e bed Brazil dedennet gant ar c'hraf-se, hag e vez laouen an holl o kenvevañ diwar reolennoù ha boazamantoù graet en a-raok hepmuiken. Ar c'hont a Keyserling, lemm e sell, en deus gwelet mat an dra-se p'en deus lavaret penaos er broioù all an dud a zvez ar pezh a fell dezho dont da vezañ diwezhatoc'h ; ar Vraziliz avat a vez a-walc'h dezho drevezañ evit drevezañ, ankounac'haat a reont e c'haller bezañ evit gwir, ha krediñ a ra dezho n'eus netra a-us da ober van gwelloc'h eget ar re all. N'eo ket dre zegouezh ne gaver e oberenn skrivagner-handerc'h brudetañ Brazil nemet ul lostad pilpouzed, farserion, tasmanted, hep e seurt er peurrest eus ar bed. E levrioù Machado de Assis an dudenn didro nemetañ, an hini nemetañ a gomz outañ e-unan, an hini nemetañ a glask emgompren ha kompren ar re all, ar c'huzulier Aires, a echu en digenvez, dre evezh ha dre sevended. Kalzig eus politikerezh Brazil a zo diverret aze.

En darvoud am eus dezrevellet a-us, ar gofesadenn, a zlefe bezañ ar gejadenn donañ etre

koustiañs an hini o kofesaat hag hollouiziegezh ar c'hofeser, n'oa mui nemet un disgejadenn etre meskaj bredel ur bugel dizesk ha brizhvoaz ur c'hofeser skuizhik gant e labour. Ar Pab Yann-Baol II a oa ar gwir gantañ p'en deus lavaret penaos ar Vraziliz a zo kristen a-fed santimant, ket a-fed feiz avat. Hep buhez diabarzh feiz ebet, hag ar vuhez diabarzh a grog gant an donedigezh en tachad-hont teñval ha serr, gant ar striv da lavaret an dilavaradus. Re ankenius seurt traoù evit Yann Vraziliz, a gav gwelloc'h klask goudor en ur gileadegezh aes da dizhout, hag a dro d'ur vloc'heil anezhañ e-unan a-benn ar fin.

Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant Ewan Delanoy, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *Um capítulo de memórias*, niverenn ar 23 a viz Even 2008.

Speredelezh ar Gwriziennadur

D'ar 14 a viz Du 2010, e brientiliz Santez Anna-Wened, e voe lavaret oferenn "Pirc'hirinded vroadel ar bed plouezet". Gant an Aotrou Centène, eskob Gwened e voe an homelienn. An anv-gwan "broadel", implijet amañ a dalvez sur-mat "c'hwec'hkognat", da lavarout eo ne oa ket ar Vrezhoned nemeto kensellet gant ar birc'hirinded-se, met bez' e tleent bezañ un darn vat eus ar berzhidi. E miz Mae 2010, e Portugal, eo bet diskleriet gant ar Pab Benead XVI : "Ur bobl a baouez da c'houzout petra eo he gwirionez dezhi hec'h-unan, a zeu d'en em goll e milendall an amzer hag an Istor, diberc'hennet diouzh talvoudegezhioù diazezet sklaer hag hep palioù bras displeget sklaer". En ur lenn ar c'homzoù-se a-berzh ar pab em eus soñjet kerent e pobl Vreizh, sachet-disachet etre div hennadelezh, an eil gall eben breizhek, kerent graet ganto o seizh gwellañ evit en em zibourc'hañ diouzh o breizhadelezh, maz eo ar yezh an arouez pennañ, evit dont da vezañ gall peurvat, ha bremañ o bugale a fell dezho adperc'hennañ yezh o zadou-kozh. N'eo ket bet homelienn an Aotrou Centène awenet penn da benn gant komzoù ar pab, hogen e keñver spered ha mennozh e tenn dezho evit un darn. Deurus a-walc'h hon eus kavet anezhi,

talbennet "Speredelezh ar Gwriziennadur", setu perak hon eus troet evit hol lennerion ar rannbennadoù pennañ.

Ar pezh n'eo ket ar C'hristen

Piv a fellfe dezhañ ober eus ar feiz katolik hag ar perzhidigezh en Iliz un istor a gizidigezh, a veno prederouriezhel, a gredenn hepmuiken evit un "doare bevañ a-gevret gwelloc'h, e kroazhentoù hon hentoù a zenelezh" ? Piv a fellfe dezhañ ober eus ar C'hrist ur "bobo" peoc'helour, o c'hourbannañ "peace and love", ur gitar en e zaouarn, en ur gumuniezh "hippie"er c'hantved kentañ ? Piv a fellfe dezhañ ober eus ar C'hristen un hunvreer habask o tegemer, distrivant ha gouzañvus, an embregadenn euzhus a glask lazhañ krouadelezh Doue e skeud un damantegezh, anv nevez roet d'al laoskentez ha d'an digasted ?

Ra vo da hennezh meizañ kement-mañ : "Doue hollc'halloudek eo Jezuz-Krist, krouer kement tra a zo, graet den, marvet ha dasorc'het evit silvidigezh an eneoù ha n'eus ket, ha n'eus ket bet, ha ne vo anv all ebet en hollved a zlefemp bezañ salvet drezañ.

En em garout hon-unan

E raklavar e gelc'hlizher *Fides et Ratio*, e skrive ar pab Yann-Baol II : “Kizellet e oa war isrizenn tempel Delphos ar c’huzul-mañ “*Em anavez-te da-unan*”, evit reiñ testeni d’ur wirionez diazez a zle bezañ kemeret evel reolenn bihanañ evit pep den c’hoant dezhañ en em ziforc’hañ, e-kreiz ar grouadelezh, oc’h en em lavar “den” dres dre “m’en em anavez e-unan”.

En em anavezout hon-unan a c’houlenn un hennadelezh personel gwriennet en un tiegezh, ur vammvro, un douar, ur sevenadur, un deskadurezh, ur prantad, en ur ger un istor. Ha petra a welomp hiziv ? Kement tra a ra hennadelezh an dud, kement tra a ro tu dezho d’en em anavezout, ha neuze d’en em garout ha dre se da garout Doue hag o nesañ, a zo kaset da fall dre araokadur ur sevenadur a varv, un enep-sevenadur oc’h irienniñ ur gwir frammadur a bec’hed a beurzistruj ar c’houstiañsoù dre voutinaat an emzalc’hioù a emzistrujidigezh denel : sioc’hanerezh, helazherezh, distruj an tiegezh, kellig diazez kement kevredigezh yac’h ‘zo, lennadur untuek an Istor hag ar skiantoù denel en deskadurezh, freuzadur al live retvez en deskamantoù, kasoni ouzh ar vammvro en ur bed annezet gant kemplezh Oidipous, emgiriegezhadur¹⁹ hollbad hon Istor.

Merourion feal

An diwriziennadur-mañ, gwashaet gant an dreist heloc’hted a-vremañ hag ur gealiadurezh vedelourel mennet da lakaat da steuziañ kement sevenadur dibar, ne c’hell krouiñ nemet an enkadenn a hennadelezh a anavezet evit ar wech kentañ, ha dre heulret an enkadenn sokial.

Arabat deomp en em douellañ, an embregerezh-mañ a ziskaridigezh ar vuhez hag an tiegezh a zo un embregerezh a ziskaridigezh ar bennaenn a dreuzkasadur dre vras, ar bennaenn a vaberezh peurgetket ; ha buket eo dreist-holl ar bloueziadelezh²⁰, ur stad a vuhez stabil, gant ur stagidigezh don ouzh an douar, prof Doue d’an denion evit bezañ ar verourion feal anezhañ, ha neket mac’homerion gwallec’hoantek ha gwarizius.

Evel ma tesk deomp ar Pab Benead XVI : “Ezhomm hon eus eus an donezon maz eo an douar, eus an donezon maz eo an dour, ezhomm hon eus eus ar C’hrouer. En em addiskouez a ra ar C’hrouer er grouadelezh. Unan ha dirannadus eo levr an natur, ha pa vefe anv eus an amvevad

pe eus ar vuhez”. A-gevret ez a ar grouadelezh hag ar vuhez, liammet ez int en un doare dizistrolladus. Er stourm-se evit ar vuhez ha neuze evit an hennadelezh e c’hoari ar steroniezh ur perzh a-bouez-tre.

Al liamm etre an ene hag an douar

Merzet em eus ne oa ket anvet an “Devezhiadoù-mañ “Devezhiadoù ar Gounezerezh-douar”, met “Devezhiadoù ploueziat”. Mard eo ar bloueziz gounideion - gounit a reont o farkeier -, hogen kalz muioc’h eget se ez int. Evel ma skrive Soljenitsyn : “E keduniezh ar ploueziad gant an douar – an eiennoù, ar gwazhioù, ar stêrioù, ar c’hoadoù, ar brouskoadoù – eo en em wrizienn speredelezh ar bobl. Diouzh an douar eo e strink stivell diheskadus ha glan ar garantez evit ar vro. Warnañ eo e vez diazezet stabiled ar Stad : al liamm don-se a ere ene ur bobl ouzh he douar, ne c’hell ket bezañ ur “varc’hadourezh” feuriet er Yalc’hsezoù, ken tost d’hor c’halon eo deomp hag hor vammvro, hag hon ene”.

Bezomp emskiantek, va breudeur ha va c’hoarezed kristen, hiziv ez oc’h un darn eus ene an denelezh, hag ez eo ent-resis evit an abeg-se e vezer mennet da gas d’ar marv, neket ar gounezerezh – ret eo ervat en em vegañ – hogen ar bloueziadelezh, hounnezh hag a wel en ur vevañ en un doare pemdeziek ouzh lusk ar grouadelezh, obererezh ar C’hrouer enni.

Fatima, La Salette, Lourdez, Pontmeven, Itron-Varia Gwadalupe, Itron-Varia Laus : bez’ e c’hellomp merzout ez eo hogos bepred ouzh ploueziz e teu war wel ar Werc’hez Vari. Amañ zoken, e kavas ar c’houer Iwan Nikolazig delwenn an Itron santez Anna, ouzh beg e bigell, en ur gleuziañ e zouar, an douar-mañ ne liv ket gevier, an douar-mañ ma strink dioutañ ar spered, an douar-mañ ma vez tennet dioutañ ar greunvaen maz eo a-drugarez dezhañ ma sav davet an Neñv hor chapelioù hag hon ilizoù-meur.

Kevreet eo er bloueziadelezh “skiant-vat ar ploueziad” : sonn en e votoù hag e dreid war an douar, na c’heller ket tremen lost al leue en e c’henou, nag e lakaat da lonkañ n’eus forzh petore kealiadurezh diouzh ar c’hiz e saloñsoù ar c’hefredva²¹, ha speredelezh don an hini a vez e keduniezh don gant an natur, hag a wel enni an diweladus.

Brezhoneg gant Yann Mikael ha Paol Kalvez

¹⁹ Emgiriegezhadur : *autoculpabilisation*.

²⁰ Ploueziadelezh : *paysannerie*.

²¹ Kefredva : *intelligentsia*.

Diabarzh ha Diavaez

« C’hwil, ar Farizianed, naetaat a rit diavaez an hanaf hag ar bladenn, hogen ho tiabarzh-c’hwil a zo leun a laeroñsi hag a zrougiezh ». Lukaz 11, 39.

Hag e lavaro Sant Paol : “*Ra lavaro pep hini ar wirionez d’e nesañ*”. Ar pezh a dalv da lavarout : “pezh a ziskleriomp d’an diavaez a rank bezañ a-stumm gant pezh a zo en diabarzh”. Hag e teu d’am spered eztaolad Amerindianed an Andez : “*iskay uyay*” (div zremm) evit lavarout ar “pilpouzerezh”. Bez’ hon eus enta da ziskouez d’ar re all dremm ar c’hempoell, ar wirionez hag ar rikted. Bez’ e talvez “kempoell” hesoned etre hon diabarzh hag hon diavaez. Paz eus dislavar etre diabarzh ha diavaez ez eus gevier, troidellerezh, pilpouzerezh.

Neuze, arabat deomp sevel hon ti war an traezh, war an distart, war ar gaou. Bez’ emañ ar falsted gwalenn guzh hor c’hevredigezhioù. Pezh a garer ez eo ar maskl, livioù ar fest ha neket an dremm merket gant kleizhennoù ar vuhez wirion amprout en un doare fetis hag a rakkemenn ar weñvidigezh da zont. Hag ivez, dindan beli an emlorc’h pe hini ar rogentez, hon eus en hon diavaez doareoù a santelezh a zo diavaezioù touellus. Ouzhpennomp da se : chom hep lavarout ar wirionez, n’eo ket ar gaou gwashañ, hogen he lavarout dizehan, evit chom hep bevañ anezhi da c’houde. Bez’ ez eo ur glabouserezh dic’houzvez anezhañ e-unan. Ne vezer ket diskibl diabarzh hepken ; bez’ e vez an diskibl ar skoliad a selaou uvel ar c’helenn, ar C’hrist. Hogen kelenner evit ar re all e vezer. Ne dremen ket Jezuz gant lavarout hepken ar wirionez – an diavaez eo – hogen seveniñ a ra anezhi – an diabarzh eo – hag e skoazell an den da vevañ ganti. Atav e lez Jezuz da darzhañ kaerder ar wirionez, hag a zo ken diac’hinek da bilpouzerezh ar Farizianed. Bez’ e tlee ar muzul

bezañ leun-barr evit d’an Aotrou diskouez ken garv o arvezioù touellus : “hencherion dall” (Mzh 23, 16), “bezioù gwennet o diavaez tra ma vez o diabarzh leun a eskern tud varv hag a bep seurt breinadur” (Mzh 23, 27), “gouenn naered-gwiber” (Mzh 23, 33)...

Bez’ e ouzomp ervat emamp hon-unan-penn war al leur, pa gouezh gouel an arvezioù kaer. Mar greomp hor seizh gwellañ da zamantiñ hepken ouzh an diavaez, e son faos hor strivoù. Se a vefe evel ur c’harr adlivet hep na vije bet digoc’hionet da gentañ, pe evel ur goantenn a gredfe bezañ fichet kaer gant un tamm ruz d’he muzelloù hepken. Daoust hag eñ ne vez ket e brezhoneg an droienn : “livañ gevier”.

Bez’ e c’houlen an Aotrou ouzomp bezañ “avizet evel naered ha didro evel koulmed”. Bez’ e komz ar ger “didro” drezañ e-unan. Anv a vez da vezañ en ur pezh hepken. Netra forc’hellek, netra arvarek ennomp. Da skouer, en ur vont da zebriñ korf ar C’hrist, tra ma vezomp gwall gablus, e livomp gevier dirak an dud. Tremen a reomp evit ar pezh n’omp ket. Da welout “hor bez ar C’hrist da wiskamant”, hervez komz an Abostol, met evit gwir n’eo nemet un treuzwisk. Tremen a reomp da gristenien vat, tra ma tebromp evel pa vije bara benniget hepken.

E-lec’h kuzhat hor sioù hag hor gwanderioù en ur c’horn – an diabarzh – diskouezomp anezho a-ouez d’an holl – an diavaez – dindan heol an Tad. Evel ar c’houer a led teil war e bark e sell d’un eostad gwelloc’h. Neuze en devo hon diabarzh dremm karantez ar C’hrist koazstaget hag hon diavaez a vo heñvel ouzh ur vankteulenn gant ur rouedigell anfarlotadus²².

Youenn Troal

²² Rouedigell anfarlotadus : *filigrane infalsifiable*.

Dazaters Youri Bezmenov e 1985

Kavet e vez an dazaters-mañ²³ war ar genroued (Dailymotion, Google, ha war meur a lec’hienn), an daveoù anezhañ : *Soviet Subversion of the*

²³ Dazaters : *interview*.

Free World Press [A conversation with Yuri Bezmenov] American Media, Westlake Village, CA. Un treuztec’had²⁴ rusian eo bet Youri

²⁴ Treuztec’had : *transfuge*.

Bezmenov (1939-1997). Daoust da vezañ kozh a-walc'h an dazaters-mañ, 25 bloaz, e vez displeget ervat ennañ pezh a zo bet ar gourzhtroerezh soviedel dre ar bed a-bezh ha marteze perak ez eo intret c'hoazh hor c'hevredigezhioù europat gant ar gealiadurezh marksour, hini Bro-C'hall dreist-holl, hag hini Breizh dre heulret.

Hiziv e tazatersomp Youri Alexandrovitch Bezmenov. Ganet eo bet Youri Bezmenov e 1939 e bannlev Moskov. Mab eo d'un ofiser a renk uhel en arme soviedel. Evodet eo diouzh skolioù begennoù ar reizhiad soviedel, hag ez eo deuet da vezañ kevarouezour war sevenadur ha yezhoù Indez. Graet en deus ur redamaezh dispar e kreiz Novosti, a oa, hag a zo c'hoazh, amsez²⁵ gwask ar reizhiad soviedel, amsez a servije ivez da andorenn evit KGB.

Tremenet eo ouzh tu ar C'hornog e 1970, goude bezañ bet divlaket penn-da-benn gant ar reizhiad soviedel, ha graet en deus an dra-se e riskl e vuhez. A dra-sur ez eo unan eus ar brasañ kevarouezourion er bed evit pezh a sell ouzh ar moederezh²⁶ soviedel, ar gaoustlennerezh²⁷ hag ar tunembregerezh²⁸

Pa gomz ar Soviedeion eus gourzhtroerezh kealiadurel²⁹, petra a vez anv ganto gant an dra-se ?

Un argerzh tamm ebet kuzh pe andezvek³⁰ ez eo ar gourzhtroerezh kealiadurel. Un ober kaset da benn a-ouez d'an holl ez eo. N'eus nemet, evit merzout an dra-se, distouvañ hon divskouarn, dibikouzañ hon daoulagad, hag e teu anat pep tra. N'eus kevrin ebet. N'eus netra da welout gant ar spierezh. Gouzout a ran ez eo romanteloc'h labourat er stlennerezh³¹, aesoc'h eo da werzhañ d'an dud. A-dra-sur ez eo evit se e vez ken karet ar filmoù doare James Bond gant filmkenderc'herion Hollywood.

Met e gwirionez, n'eo tamm ebet ober spierezh, obererezh pennañ KGB. Hervezon, ha diouzh pezh a soñj kalz treuztec'hidi o deus an hevelep amlun³² ha me, e vez gouestlet d'ar spierezh er

²⁵ Amsez : *agence*.

²⁶ Moederezh : *propagande*.

²⁷ Gaoustlennerezh : *désinformation*.

²⁸ Tunembregerezh : *manipulation*.

²⁹ Gourzhtroerezh kealiadurel : *subversion idéologique*.

³⁰ Andezvek : *illégal*.

³¹ Stlennerezh : *activité de renseignement*.

³² Amlun : *profil*.

ster rik, 15% hepken eus an amzer, eus an arc'hant hag eus ar c'hoskor. Gouestlet e vez ar 85% a chom d'un argerzh gorrek-kenañ, a anver gourzhtroerezh kealiadurel, pe tunembregerezh ar c'hedveno, pe brezel bredoniell. Aroueziñ a ra se, ent-penn-dalc'hel, kemmañ merzidigezh ar gwirvoud evit an holl Amerikaned, betek ar poent ma ne vefe, daoust da builhentez ar stlennadennoù, ne vefe den ebet ken gouest da zerc'hel ur poellataerezh reizh a-benn difenn e lazou dezhañ, re e diegezh, re e strollegezh, pe re e vro. Un argerzh gwalc'herezh-empenn gwitibunanez eo, a ya gorrek-tre, seul c'horrekoc'h ha maz eus pevar lankad ennañ.

Hini an digalonekadur eo al lankad kentañ. Ret eo etre pemzek hag ugent vloaz evit digalonekaat ur vroad-tud. Perak kement a vloavezhioù ? Dre maz eo an niver izelañ a vloavezhioù ret evit kelenn ur rummad studierion er vro vuket, hag evit engwallañ³³ anezhañ ouzh ar gealiadurezh enep. Gant gerioù all ensilet e vez er mare-mañ, ar gealiadurezh marksour-leninour e speredoù goveliadus tri rummad Amerikaned yaouank d'an nebeutañ, hep kejañ gant harz ebet, hep bezañ gourzhpouezet³⁴ gant talvoudegezhioù diazez Amerika pe ur vrogarantez amerikat.

Bez'e oa obererezh pennañ ar c'hombodspierezh dastum pikoloù kementadoù a stlennadoù war tudoù a veze benvekaet³⁵ da c'houde evit levezonañ ar c'hedveno : embannerion, skrivagnerion, kelaouennerion, dremmourion, desaverion, kelennerion skiantoù politikel, kannaded, graouerezhourion³⁶... Rannet e oa an darn vrasañ eus an dud-se e daou strollad : pennlusket e veze ar re a harpe politikerezh ar renad soviedel da gemer staeloù a c'halloud, war-bouez ur palvataerezh eus ar c'hedveno hag eus ar meziennoù. ; rivinet e oa brud ar re a nac'he levezon ar gevunouriezh en o bro. Pe e oant andishaet. Ent fizikel. Retvez an dispac'h !

Da skouer, andishaet³⁷ ez eus bet meur a viliad Vietnamiz en un nozvezh hepken, en ur gêr vihan er Su-Vietnam, goude m'eo bet kemeret ar gêr gant ar Viet-Cong, a-benn daou zevezh hepken. Ha biskoazh n'eo bet komprenet gant ar CIA, penaos o devoa graet ar gomunourion evit mont ken buan, evit raganaout pep hini anezho,

³³ Engwallañ ouzh : *exposer à*.

³⁴ Gourzhpouezet : *contrebalancé*.

³⁵ Benvekaet : *instrumentaliser*.

³⁶ Graouerezhour : *businessman*.

³⁷ Andisha : *éliminer physiquement, exécuter*.

anavezout o chomlec'hioù emen o c'havout, o herzel, kement-mañ en un nozvezh hepken, a-boan un nebeut eurvezhioù, a-raok tarz an deiz, hag o berniañ e-barzh sammorelloù, o bleniañ er-maez eus kêr hag o andisha.

Eeun kenañ eo ar respont : kalz a-raok ma voe gouzalc'het ar gêr gant ar gomunourion, e hanveze ur rouedad klok a ditourerion, Vietnamiz o annez er c'horn-bro, a ouie pep tririk diwar-benn tud barrek da levezonañ ar c'hedveno, betek barverion traken pe blenierion feurkarr. Andishaet eo bet an holl re a oa a-du gant ar Stadoù Unanet. Heñveldra eo bet graet e Hanoi en Norzh Vietnam, pep tra sturiet ganr ar C'hannadti Soviedel, hag e raen-me traoù heñvel e New Delhi. Gant ar brasañ skrijadenn-euzh em eus dizoloet, e teuliadoù an dud a oa o vont da vezañ andishaet, anv kelaouennerion soviedkenduidi³⁸ a oa mignoned din.

- *Soviedkenduidi ! ?*

- Ya, a-grenn ! Difenn a raent un uhelvennad komunour, graet o devoa meur a veaj en URSS. Ha koulskoude e oa bet divizet gant KGB - retvez an dispac'h, na petra -, evit kas da benn vat ar c'hemmadennoù politikel dizamant en Indez, e oa ret skarzhañ kuit anezho.

- *Perak an dra-se ?*

- Dre ma ouient re a draoù... Traken dre ma teu ar "vajaneion eürus", an dud a gleiz hag a zo derc'helour, a gred e kaereded ar reizhiad soviedel, komunour, sokialour... da vezañ gwashañ enebourion ar reizhiad, pa zigoront o daoulagad war ar gwirvoud,

Setu perak e poueze peurgetket va c'helennourion e KGB war ar poent-mañ : gwech ebet ne zleit bezañ prederiet gant ar gleizelourion³⁹. Disoñjit ar gisti politikel-mañ. Bukit uheloc'h. Evel-se e oa va sturiadurezhioù. Klaskit en em silañ er meziennoù mirour diazezet mat, klaskit tizhout ar genderc'herion filmoù pinvidik gant milionoù, ar gefredourion, ar metou emanvet akademiek, it e darempred gant an dud gonek⁴⁰, an emgerc'heion⁴¹ a c'hell livañ gevier deoc'h gant doare un ael, en ur sellout ouzhoc'h war-eeun en ho taoulagad. Setu an dud a oa ret deomp tuta : ar re n'o devoa pennaenn divezel ebet ken, tud o c'hoantaat ar galloud, ar re en em gemer evit pezh n'int ket, ar

³⁸ Soviedkenduidi : *pro-sovietiques*.

³⁹ Kleizelour : *gauchiste*.

⁴⁰ Konek : *cynique*.

⁴¹ Emgerc'heg : *égocentrique*

re a gred dezho bezañ tud a-bouez. Setu ar rizennoù tud a glaske KGB tuta.

- *Hogen evit skarzhañ ar re-all, n'int ket talvoudus ?*

- Nann, ne vezont talvoudus nemet e lankad distabilaat ar vro. Sed amañ ur skouer : benvekaet e vez an holl dud a gleiz amañ, an holl gelennerion-mañ, hag an difennourion hollgaer-mañ eus ar gwirioù d'an ingalded, en argerzh-mañ a c'hourzhtroerezh, ha nemet evit distabilaat ar vro. Pa vo kaset al lankad-mañ da benn vat, ne vo mui ezhomm anezho. Re a draoù e ouzont. Pa gouezho an touellc'hoanagoù, ur wech diazezet ur galloud marksour, e vint droukskoget evel-reizh, rak krediñ a reont ez eo int a zo o vont da gemer ar galloud. Ne c'hoarvezo ket an dra-se evel-just. Steudennet e vint ouzh ur voger hag andishaet. Bez e vefent enebourion touetañ ur renad marksour-leninour.

Bez' ez eo pezh a zo tremenet e Nikaragwa : soñj hoc'h eus paz eo bet taolet en toullbac'h an darn vrasañ eus ar gomunourion gozh, pe pa dremenas unan anezho er c'hamp enep evit enebiñ ouzh ar sandinourion. C'hoarvezet eo ivez en enez Grenada, gant Maurice Bishop, eus ar strollad marksour, paz eo bet andishaet gant unan all, marksouroc'h egetañ. Traoù heñvel en Afghanistan paz eo bet drouklazhet Taraki gant Amin, e-unan drouklazhet gant Karmal gant skoazell KGB. Traoù heñvel er Bangladesh, gant Mujibur Rahman, ur bleinour a gleiz soviedkenduad-tre, drouklazhet gant e vignoned o-unan, komunourion en arme. Bewech e vez adc'hraet an argerzh en un doare heñvel-rik. Ur wech m'o deus servijet, e vez andishaet ar "vajaneion eürus" betek an hini diwezhañ – komz a ran eus an derc'helourion varksour – pe harluet, pe taolet en toullbac'h evel e Kouba, e-lec'h ez eus kalz a varksourion gozh er prizon.

Ent penndalc'hell ez eo enket Amerika gant an disdeltuerezh⁴²-se. Mar c'hoarvezfe deoc'h kregiñ bremañ, er vunutenn-mañ, da stummañ ur rummad nevez a Amerikaned, e fello deoc'h memestra etre 15 ha 20 vloaz evit eilpennañ an doug, evit eilpennañ ar verzhidigezh kealiadurel-se ag ar gwirvoud, ha dont en-dro d'ar stad reizh ha d'ar c'healioù brogar.

An disoc'h ? Bez' e c'hellit arvestiñ ouzh an disoc'h. An darn vrasañ eus ar re o deus graet o studioù er bloavezhioù c'hwegont, eus ar re o deus kuitaet ar skol, hag an darn vrasañ eus ar

⁴² disdeltuerezh : *démoralisation*.

vrizh-kefredourion a zalc'h er mare-mañ staeloù a c'halloud er gouarnamant, en amaezhiadurezh, er graouerezh, er meziennoù, pe e reizhiad an deskadurezh. Gennet ez oc'h ganto. Ha ne c'hellit ket en em zizober diouto. Poreet ez int. Luniadet⁴³ int bet evit soñjal hag ersaviñ ouzh lod kentrigennoù⁴⁴ en un doare savelet. Ne c'hellit ket kemman o doare da welout, zoken ma tiskouezit dezho stennadennoù⁴⁵ gwiridik. Zoken ma tefraeshait⁴⁶ dezho ez eo gwenn pezh a zo gwenn ha du pezh a zo du, ne c'hellit ket daskemmañ o merzidigezh diazez hag o foell emzoug.

Gant gerioù all, gant an dud-se ez eo hollek ha dieiltroadus⁴⁷ an argerzh disdeltuerezh. Evit d'ar gevredigezh en em zizober diouzh an dud-se ez eo ret gortoz a-nevez etre pemzek hag ugent vloaz, evit skoliata ur rummad nevez a studierion, sankañ en o speredoù kealioù brogar hag ober ganto tud a skiant vat, o wezhiañ⁴⁸ diouzh lazou ar gevredigezh amerikat. Hag an dud-se a zo bet luniadet, hag a zo er framm, tuet d'ar c'healioù komunour, bez' ez eo an hevelep tud-se a vefe tonket dezho bezañ lazhadeget gant ur reizhiad evel-se. An darn vrasañ anezho, ya. Hepmuiken dre ma fellfe dezho darsaviñ dirak ar stok bredoniel a ziwaskfent en ur zizoleiñ pezh a zo e gwirionez o hollgaer a gevredigezh a gevatalded hag a reizhded, anat eo. Drouklaouen-kenañ e vefent, dizvoziat⁴⁹. Ha ne c'hell ket ur renad marksour-leninour goulezel⁵⁰ an doare-se a dud. En em adstrollañ a rafent a-dra-sur gant kamp an disrannidi hag ar c'hourzhenebidi⁵¹. Hag en diforc'h diouzh ar Stadoù Unanet bremañ, n'eus ket plas evit an disrannidi en ur renad marksour-leninour. Amañ e c'hellit dont da vezañ brudet-kenañ evel Daniel Ellsberg, pe pinvidik dreistmuzul evel Jane Fonda, o strewiñ mennozhioù disrannat pe o pismigañ politikerezh ar Pemkogneg. En ur reizhiad varksour e vefent hepmuiken pffut ! flastret evel c'hwil-du. N'o devefe netra en distro d'o c'healioù kaer hag hael a gevatalded. Ne vez ket komprenet an dra-se ganto. Ur stok spouronus e vefe evito.

⁴³ Luniadet : *programmé*.

⁴⁴ Kentrigenn : *stimulus*.

⁴⁵ Stennadennoù : *des informations*.

⁴⁶ Defraeshaat : *démontrer par le raisonnement*.

⁴⁷ Dieiltroadus : *irréversible*.

⁴⁸ Gwezhiañ : *agir*.

⁴⁹ Dizvoziat : *frustré*.

⁵⁰ Goulezel : *tolérer*.

⁵¹ Gourzhenebad : *opposant*.

Hogos echu eo an argerzh disdeltuerezh er Stadoù Unanet. Hag an dra-se abaoe 25 vloaz. Aet eo zoken en tu all d'ar pezh a c'helle bezañ goanaget. Tizhet e vez hiviziken ken bras ledander gant an disdeltuerezh, ma ne vije ket hunvreet gant Andropov hag e gevarouezourion⁵² hevelep berzh. Evit an darn vrasañ e vez graet bremañ gant an Amerikaned o-unan war Amerikaned all, a drugarez da steuziadur ar spisverkoù⁵³ divezel evel ma 'm eus lavaret a-raok, lavarout ar wirionez [war ar renadoù marksour] n'en deus talvoudegezh ebet ken. Un den disdeltuete n'eo ket barrek ken da lakaat e penn-kont gwirvoudegezh an traoù. An devoudoù⁵⁴, an dirvoud⁵⁵, ne vez mui tizhet ganto. Zoken mar befe bombezet ganin a stlennadennoù, a brouennoù diles, a zielloù, a luc'hskeudennoù, zoken mar befe kaset ganin dre an nerzh en URSS evit diskouez dezhañ kampoù ar GOULAG, e nac'hfe hen krediñ, betek na zegemerfe ur pezh mell taol botez ouzh e revr. Ned eo nemet pa gouezho warnañ ar votez milourel e kompreno neuze. Hogen ket a-raok. Bez' ez eo kement-se reuzc'hoari an disdeltuerezh.

An distabiladur eo al lankad war-lerc'h : en degouezh-mañ ne vez mui an dispac'herion evit en em chalañ gant ho kealioù, gant ho toareoù bevañ. Kement-mañ ne gont mui. Kemer a ra an dra-se etre 2 ha 5 bloaz evit distabilaat ur vro, ha pezh a gont ez eo an diazezoù : an armerzh, an darempredoù gant ar broioù all, an difenn. Hag e c'heller gwelout sklaer e vez marzhus levezon ar c'healioù marksour-leninour e lod damanioù, evel damanioù ken kizidik hag hini an difenn pe an armerzh. Ne greden ket va daoulagad, setu pevarzek vloaz 'zo, paz on degouezhet amañ, ne soñjen ket e vije bet aet ken buan an argerzh.

An darsaverezh⁵⁶ ez eo al lankad da heul. Wardro c'hwec'h sizhun a zo ret evit degas ur vro er stad a enkadenn, evel ma c'hellit hen gwelout er mare-mañ e Kreizamerika.

Goude an enkadenn, war-lerc'h ar c'hemmadurioù taer a renad, a frammadur hag a armerzh, e teu pezh a anver al lankad a gantreoliaidigezh⁵⁷, a c'hell padout da virviken. Un eztaolad konek⁵⁸-tre ez eo ar ger

⁵² Kevarouezour : *expert*.

⁵³ Spisverkoù divezel : *repères moraux*.

⁵⁴ Devoudoù : *les faits*.

⁵⁵ Dirvoud : *le réel concret*.

⁵⁶ Darsaverezh : *insurrection*.

⁵⁷ kantreoliaidigezh : *normalisation*.

⁵⁸ Konek : *cynique*.

“kantreoliaidigezh”, askoret⁵⁹ diwar ar moederezh soviedel. Paz eo bet aloubet Tchekoslovakia gant an tankoù ez eo bet diskleriet gant Brejnev : “Bremañ ez eo kantreoliet ar saviad e Tchekoslovakia”.

Hag ez eo pezh a c’hoarvezo er Stadoù-Unanet mar lezit an holl veulkeed-se da zegas ar vro d’an enkadenn, mar lezit anezho da azaviñ⁶⁰ d’an dud moliac’hoù hag ar baradoz war an douar, mar lezit anezho da zistablaat hoc’h armerzh, da raskañ ar frank-eskemm, ha da lakaat ur gouarnamant Big-Brother e Washington, gant trozrenerion⁶¹ vadelezhus doare Walter Mondale a azavo deoc’h kement tra a fell deoc’h, ne vern ma vefe dalc’het d’ar gouestlòu-se pe na vefe ket. Goude-se ez aio da boket da dreid ar rummad nevez a dorfedourion gomunour. Diskouez a raio an azvan⁶² da ren an traoù gant daouarn bostek, hag e vez reolet ar saviad gantañ.

Hogen ar saviad n’emañ ket dindan reolerezh. Bez’ emañ zoken er-maez pep reolerezh en un doare spontus. An darn vrasañ ag ar bolitikerion amerikad, an darn vrasañ ag ar meziennou, hag ar reizhiad kelenn a stumm ur rummad tud a gred bevañ ur marevezh a beoc’h. Faos eo. E stad a vrezel emañ ar Stadoù Unanet. Ur brezel nann diskleriet hag hollek, a-enep da bennaennoù ha diazezoù end-eeun ar reizhiad-se. Ha pennlusker ar brezel-se n’eo ket Andropov, evel-just, bez’ ez eo ur brezel a-enep d’ar reizhiad komunour bedel, ken lu hag a hañval bezañ, pe a-enep an irienn gevunour bedel, pe e vefe spontet pe nann an dud gant se, ne ra vern din. Ha mar ne ra ket se aon deoc’h bremañ, netra ne raio aon deoc’h hiviziken... Arabat deoc’h dont da vezañ paranoek war an divoud-se. Da lavarout gwir, pezh a dremen er mare-mañ, ez eo, e-gin-kaer din hoc’h eus c’hoazh meur a vloavezh da vevañ – nemet ha mennet e vefe Amerika da zihuniñ – gant ar vombezenn-se war zale Hag emañ an drouziwezh o tostaat un tammig muioc’h da bep eilenn. Hag en diac’hin din, n’ho pezo lec’h ebet evit ho repuiñ. Nemet ha mont d’an Adarzhrod, gant ar pengwined. Amañ, emañ bro ziwezhañ ar frankizoù, e-lec’h ez eo beziadus pep tra.

Neuze petra ober ? Petra a erbediit d’an Amerikaned ?

Kentañ tra a zeu war va spered, ez eo, ar retvez d’ur striv broadel a vent vras evit kelenn an dud war du

⁵⁹ Askoret diwar : *issu de...*

⁶⁰ Azaviñ : *promettre*.

⁶¹ Trozrener : *dictateur*.

⁶² Azvan : *illusion, semblant*.

an talvoudegezhioù a vrogarantez, ha goude-se displegañ dezho dañjer gwirion ar reizhiad sokialour, kevunour, ne vern petra e vefe e anv, dañjer ar stad-warez, ar reizhiad Big Brother. Mar ne c’hoarvez ket d’an dud tresantout nested ar begozh hag eus an emdroadur-se, netra ne skoazello ar Stadoù-Unanet. Bez’ e c’hellit kimiadiñ d’ho frankizoù, da rezid an heñvelrevidi, da gwirioù an dud vac’het... Steuziañ a raio ho holl frankizoù, pulluc’het e vint en un nebeut eilennou. Hag ho puhezioù prizius war un dro. Eil tra : kendrec’het ez eo ul lodenn eus ar boblañs d’an nebeutañ war gwirvoudegezh an dañjer ; ret eo dezhi rediañ ar gouarnamant – ne gomzan ket eus kas lizhiri, kas ervennadegoù, pe obererezhioù all, hael ha kaer, diouzh ar sort -, komz a ran ervat eus rediañ ar gouarnamant da baouez da skoazellañ ar gomunouriezh.

Brezhoneg gant Yann Mikael ha Paol Kalvez.

Aet eo da Anaon an Itron Olier, gwreg da Youenn Olier, 87 bloaz e oa, lidet eo bet hec’h obidoù d’an 2 a viz Here 2010 e Kistreberzh.

Anavezet em eus an Itron Olier adalek an amzer ma teue gant he gwaz hag o holl vugale d’an Oferenn a veze bep Sul e brezhoneg e Roazhon er bloavezhioù 1965-1990 ; ha goude an Oferenn e veze un emvod etre an holl diegezhioù a gemere perzh a-hend-all er pezhioù-c’hoari, pourmenadennoù, predoù hag emvodoù a veze aozet alies e framm EMGLEV AN TIEGEZHIOU amañ hag a-hont e Breizh. Niverus e oa ar vugale en tiegezhioù, ken en em gavemp alies ouzhpenn tregont a dud, ha brezhoneg hepken ganeomp eveljust.

A-hend-all p’am eus kroget ervat da labourat e Skol an Emsav (1971-1973) hag er gelaouenn IMBOURC’H gant he gwaz betek marv hemañ c’hwec’h vloaz bennak 'zo e vezen hogos bep miz degemeret hegarat-tre gant mestrez an ti, koulz ha gant he bugale ha bugale vihan.

Hag an heverkañ holl, pa soñjan bremañ pegen harozel e oa neuze derc’hel d’ar brezhoneg, hini ebet anezho n’en deus komzet e galleg ouzhin. Evit-se ivez em eus anaoudegezh vat ouzh an Itron Olier.

Paol Kalvez

Setu deuet dibenn 2010 gant an niverenn-mañ eus *Kannadig Imbourc’h*, soñjit, mar plij, da gas ho skodenn, 13 €, da adkoumanantiñ evit ar bloaz nevez. Trugarez en a-raok !

Nedeleg laouenn deoc’h holl, hag hor gwellañ hetoù evit ar bloaz nevez o tont

Mererezh

13 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (16€ er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://pagesperso-orange.fr/kannadig/> (*Notit eo bet kemmet chomlec'h lec'hienn EAT-IMBOURC'H*)

Skridaozerezh

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù**. Kergreven - 29800 Trelevenez - ISSN : 1144 357X